

(328)

Continuation all

Oberiou caer Napoleon,

A guichen bataill vras Eylau, an 8 a vis c'hoer 1807, betec
ar p'roc'h sinet er guer a Dilsit entre an daou Impalaer a
Frang hac a Russi, ar Roue Pruss, an 9 a vis gouere, memes blavez.

Dre F.^s Guenveur.

Var ton : Près des bois, des prés, des rivières.

Gemer a rân pluen adare,
Gant plijadur ha joaisted,
Da scrifa vaillantis hon arrou,
An triomphussa eus ar bed.
Gant memes plijadur e velfet
Eo c'hoas confortet ahevitanç
Ar Roue Pruss, ar Russianet
Dre 'n Impalaer bras a Frang.

D'ouspen trivac'h mil den armet;
Var e rampariou tri c'hant canon,
A vuraillon cren voa cernet.
Dre ze an hini a goumande
A ras e zever d'e difen;
Mes inutilamant an dre-ze,
Plega renqas d'ar Francisien.

(329)

D'e zoudarded e roas repos
Goude 'r bataill griz a Eylau,
Neuze Napoleon a bropos
D'ar Russ en em glêvet eno:
Alexand, ha dany e vignonet,
A zeblant selaou gant joa vras;
Hoguen, ar Toz cruel, binimet,
A voad ne voa get mêvet c'hoas.

(330) Etrapad ouzpen daou vis amzer,
Gant eur vigour eus ar ferma,
Ar guer a Dantzick a vombarde,
Defot n'e deu d'en em rente.
Lancet voe enni deg mil bombes
Hac ouzpen trégont mil boulet;
Flastret voe an anter e ziez,
Ha calz a berc'hennou friget.

Pa velas n'elle get conclui,
Da lacat talvoud an amzer,
Hon Impalaer a ras cerni
D'ar Roue Pruss er grénva Kaer:
Ar guer gaer-mañ zo hanvet Dantzick,
D'ar rouantelerz e grignol;
Plaç caer bras percousilz ha pinvidic,
Ha dre ze brudet dre 'r bed oll.

Ar c'hoec'h-vernugent eus a vis mae,
Er blavez seiz ha trivac'h cant,
E'h antreas enni hon arme
Gant e banielou triumphant.
Accordi rès d'an enemiet
Conje da return en o brô,
Gant condition ne zougjent get
Enpad eur bloavez an arrou.

Ar guer-mañ e devoa garnison

Eur guer eus pinvidica 'r bed-mâ
A ranc cedi d'hon haroet,

290

Calz bevañz da zebri, da eva
 A gavont enni dastumet.
 Duzpen c'hoec'h tant mil quintal giinis (331)
 A voa en e magazinou,
 Avoal' h evit sustanti c'hoec'h mis
 An darnnua eus hon trouplou.

Empad gement-mañ voe conchuet
 Formi assamble general,
 Da zispuit droajou 'n oll brincet,
 Hervez an uzach ordinal.
 Napoleon a voa dispoet
 Da gommang dre gomzou peoc'hus,
 P'en em vel a nevez attaget
 Dre 'n arme 'n impalaer Russ.

Ar goad a vo adare scuillet,
 Mes ne vo get dre fot ar Franç;
 E chef bras en devoa discuelet
 Dezir ardant d'e gonservañ.
 Den abet ne alle supposi
 E clasqjet c'hoas cresqi e c'hloar,
 Rac goud a r'er n'en deus hini
 Qer pourveet var an douar.

Dre 'n gloar ma vije c'hoas gouonnet (332)
 Goude rentidigez Dantzick,
 Ar c'hampagn en dije digoret
 Da flastria 'n roue Frederic.
 En esperañz e teuje var-vad
 An trietadurez commancet,
 Ne zönje en nep seurt er gombat
 Er moment ma voe defiet.

Var dranguilite Napoleon
 Ez int bet c'hoas en em dromplet;
 E repos zo hini eul leon
 O devo quuz bea troublet.
 Ho follente, princet aheurtet,
 A gousto gluc'har en ho pro:
 Qerent, mignonet ho soudarded

A rebecho dec'h o maro.

Ar bempet demeus a vis even,
 E veljot ar gommancament,
 Dre 'n gombat livret tost Louritten,
 A zirout arme Alexand.
 A dal an deiz-se d'an daouzecet, (333)
 En Gustad, Heisberg ha Spanden
 Hon adversourier o deus collet
 Plaçou cren ha triegont mil den.

A guer Heisberg int en em dennet
 Buannoc'h eguet ne voant deut,
 Oc'h ober eun dilezel foreet
 D'ouspen pevar mil quintal bleud.
 Magazinou hac hospitaliou
 Dre oll a rancjont dilezel
 Erit tec'hel aroc hon trouplou,
 Pa n'o devoa c'hoant da vervel.

Ar gombatjou divea hanvet
 Bras m'ezint bet, a zo bian,
 Evel mar her aman d'er gjelet,
 En gever bataill Friedland.
 Ar bevarzec, qerqent an de,
 E tennas ar Russ e ganon;
 Mes james ne gaver dibourve
 Compagnunet Napoleon.

An Haros a lavar d'e drouplou: (334)
 « An deiz-mañ vo ive eurus;
 » Ar memes deiz bataill Maringo
 » A rentas ho cloar hir-badus.»
 Ar victor, fidel d'e mignonet,
 Ne voe get eun instant douetus,
 An tol marrus dreizi zo roet
 D'arme an impalaer Russ.

Spontus voa gjelet plaç ar gombat.
 Duzpen c'hoepag mil den lazet
 A voa enni, bempet en o goad

Eus arme hon enemiet.
 D'hor hini e voe lazet pemp cant,
 Ha pèvar mil a voe blesset ;
 Coll bras, sivoas ! gouscoude neant
 Eus equile comparachet.

Pemp varnuquent a generallet
 A rancas divoer Alexand.
 Hon Impalaer en deus collet
 Unan demeus e re vaillant.

(335) An enemy a voe poursuet
 Betec unneec heur eus an n'os,
 Dre 1^h hentchou var e lerc'h voe carvet
 Galz a ganonniou antronos.

En Kenisberg, var rivier Prejel,
 D'ar roue Pruss Kaer gapital,
 Ee'h antreas goude ne voe pell
 An Autrou Sault, ar marechal.
 An daou roue a voa dillojet
 Eus ar guet. - man dre brim furnes.
 Ah ! m' o devije bet gortset,
 E vijent paqet assambles.

Er guet drificus - man zo carvet
 Pèvar c'hant lestr, a vadou leun ;
 Uguent mil soudard a re vlesset,
 Magazinou carquet a c'hreun,
 Munitionou a bep feçon,
 Ha daou c'hant mil fusuill nevez,
 Digasset eno gant ar Zozon
 Ha grèt eus o fabriqerez.

(336) Ar bemp, herves m' hon eus er g'ielet,
 E commançjot en em ganna ;
 En deg deiz arme r Russianet,
 Rest hini r Pruss er memes tra,
 O deus collet tri-uguent mil den,
 Blesset, maro, pe brisonniet ;
 Hac o br'gajou var eul lignen
 A zaou-uguent l'eo hirdet.

Hon Impalaer d'e zoudardet
 Goude 'lowaras evellen :
 " Ho victoriou zo, va mignonet,
 " Ger prompt evel eul luc'heden.
 " En Austerlitz oc'h eus celebret
 " Devez va c'herunkedigrez ;
 " En Friedland oc'h eus memoret
 " Eus a Varingo an devez.

" Dign e zoc'h da vea Francisien,
 " Ha dign e zoc'h ac'hanon - me ;
 " En ho p'ro ee'h antreet souden
 " Gant ho palmez hac ho lore.
 (337) " Paent eo dezi gemeret repos
 " Dre beoc'h profitapl ha padus ;
 " Tranquil var droucniachou ar Zoz,
 " Dre ho courach digomprenus. "

Ar bemp varnuquent e voa savet
 Var rivier vras ar Niemen,
 Eur pavillon d'an Impalaer
 Var eur radel grèt [gant] plengen :
 Emo, pepini eus e goste,
 O daou e zint en em rentet,
 Da un heur sonet goude creiz-de,
 En presanç, o grouplou renjet.

An diou varz partiet assambles
 Gant pepini un Impalaer,
 O deus depordet o majestez
 Er radel er memes amzer.
 Goude ma voent en em vrietet,
 Alexand ha Napoleon,
 Raetal virant ez int antreet
 O daou hepquen er pavillon.

(338) Div heur eo bet an antretien
 Entre 1^h daou Impalaer bras,
 Goude pimi voe roet antien
 D'ar re o heuille var ar plas.
 Impalaer Russ d'hor generallet

292

Traou agreabl a lavaras ;
 Napoleon n'en deus get manget
 Var gont e re d'en trec'het c'hoas.

Goude-ze an Impalaeret
 A zo pignet en o barqou,
 En presanç eur immanç renget
 En peb-tu d'ar rivier, var vordou,
 En o c'halonou an ahentanç
 O devije in daou zen vaillant
 En div heur-ze eus a gonferanç
 Roet ar peoc'h d'ar c'hontinant.

O esperanç ne voe get tromplet,
 Roc an nao eus a vis gouere
 Goude caera campagn eus ar bed,

(Vol. VII, p. 328-339.)
 strophes non numérotées.

Voë grêt ar peoc'h deziret-ze.
 Broyou in c'hontinant zo en repos (339)
 An eil en qever equile
 Ha complodet a enep ar Zoz,
 Gen a vo sujedet gantè.

Disquizonn breman gant hon arme,
 Da c'hortos issu ar peoc'h-mâ;
 Ganti e commancimpr adare,
 Mar be foret d'en em ganna.
 En em fiomp en Napoleon,
 Erit digas var vad ar rest:
 An dezirion demeus e galon
 B'hon renta eurus a zo goest.